

Ar Gazetenn vihan



*

Gant kalz a sujedoù disheñvel hag istoriou a bep seurt danevelloù : polis, istorioù a garantez , reportajoù, bandennoù treset...

D'ar sinema gant Alexie

Ur wech e oa hag ur wech ne oa ket ur den vihan anvet Malo en doa c'hoant mont d'ar sinema gant ur plac'h, koulskoude n'ouie ket penaos pediñ anezhi. Un deiz e lakaas ur bragoù brav, mont a reas da welout e amezeg, Lusien, hag goulenn a reas gantañ penaos ober. Neuze e lavaras Lusien dezhañ n'en doa nemet da lakaat he fulupenn e-barzh ar pod yaourt. Goude-se e c'houlennas e ali gant Louison. Lavaret a reas Louison e oa ret dezhañ bezañ seven ha lavaret « Demat » da gentañ, peogwir ne rae ket james. Goude kreisteiz e reas Malo e vennozhañ ha mont a reas da welout ar plac'h koant. Laouen-tre met un tammig aonik e oa peogwir n'en doa ket c'hoant d'ober kazeg. Neuze ez eas, amañ e oa Alexie, brav e oa ruz e oa e benn peogwir e oa lent. Lavaret a reas « Demat ! » dezhi hag komz a reas deus an amzer peogwir ne grede ket Malo bezañ eeun.

« Demat, babig, c'hem... Alexie...

- Demat, Tadig, c'hem... Malo...

- An amzer a zo brav, neketa ?

- A ya... Met bez ez eus un avel vihan, ket ?

- Ya, un avelig, ya...

- Alexie ? Ur c'houlenn m'eus ...

- Ya ?

- Penaos lavaret dit... c'hem... Daoust hag eñ t'eus c'hoant da vont ganin d'ar sinema ?

- C'hem... n'ouzon ket peogwir n'ouzon ket petra a rin d'an dibenn sizhun-mañ. Neuze ya, met marteze ket....

- Trugarez... Marteze am bo chañs.

- Ya, met penaos lavaret dit... c'hem....

- Ya, babig ? C'hem... Alexie ?

- C'hoant am boa da LAVARET un dra dit-te....

- Ya, petra ?

- Penaos lavaret... Abaoe un nebeud devezhioù e santan santimantoù evidout...

- Ah ! C'hem, c'hem... me ivez ! >>

Abaoe an deiz-mañ e voent an daou skolerien amourous-tre an eil d'egile. Tregont vloazh goude o doa ar c'houlplad gant kalz a bagigoù...



Ar vizitourien : ur wech e oa...

An istor : e 1789, e-pad an Dispac'h bras, eo erruet Jacouille al Lampon gant Aotroù Montmirail, peogwir en deus c'hwitet ar sorser e daol ur wech c'hoazh. Neuze Jacouille hag Aotroù Montmirail a zo o klask ur sorser all evit mont en-dro d'o amzer. Kejet 'vo tud an noblañs, diskenidi Aotroù Montmirail, ha dipac'herien outo.

Skipailh ar film : Jacouille al Lampon eo Christian Clavier hag Aotroù Montmirail eo Jean Reno. Ar realisatour eo Jean-Marie Poiré.

Hon ali : plijus hon 'oa kavet ar film peogwir e oa fentus.



Yann ha Goulven, 6vet2

AR PLANETARIUM



Ar planetarium zo lec'hiet e Pleumeur-Bodoù. Ar planetarium zo ur savadur gant ur sfer vras e-kichen.



E-barzh savadur ar planetarium ez eus ur sal evit sellet ouzh filmoù berr. E-barzh ar sal-mañ ez eus un animatour ivez, hag a zispleg mont en dro koskor an heol. Ouzhpenn-se ez eus salioù-all e-lec'h ma c'heller ober arnodadoù evit kompren an traoù gwelloc'h.

Aurégane, 6vet2

SONEREZH

Ur c'hwiz diwar-benn ar c'hanaouennoù hag ar ganerien eus ar bloavezhioù 80.

Kavit ar respontoù mat !

1)-Piv en deus kanet «Billie Jean» ?

- a-Michael Jackson
- b-Prince

2)-Petra eo anv ar strollad en deus krouet « I was made for loving you » ?

- a-Europe
- b-Kiss
- c-OMD

3)-Pegoulz e oa bet krouet « Enola gay » gant OMD ?

- a-1985
- b-1980
- c-1990



4)-Petra eo anv strollad Sting ?

- a-Europe
- b-Police
- c-Kiss



5)-Liammit an anvioù eus ar Jackson Five gant an deizhiadoù ganidigezh.

- | | |
|-----------|--------------------------|
| a-Jackie | a' -29 a viz Eost 1958 |
| b-Tito | b' -12 a viz Meurzh 1957 |
| c-Jermain | c' -15 a viz Here 1953 |
| d-Marlon | d' -11a viz Kerzu 1954 |
| e-Michael | e' -4 a viz Mae 1951 |

Responoù : 1. a ; 2. b ; 3. b ; 4. b ; a. e' - b. c' - c. d' - d. b' - e. a'.

Thomas, 3de2

KRISMENN



Krismenn, eus e anv gwir Christophe Le Menn, a zo ganet e Plougastel-Daoulas, e Breizh. Tri bloaz ha tregont eo. Ober a ra kan hengounel (gwerz, kan ha diskan), met ivez hip-hop, sonerezh elektronek, blues eilet gant beat-box. Seniñ a ra gourboud hag gitar « slide ».

→ Perak Krismenn ?

Ur serr-lagad d'ar vro Gebek eo, rak pa ho peus c'hoant galv unan-bennak ahont, e lavarit : « Chriss, men ! », da lavaret eo : « Hola, paotr ! ». E bro Gebek en doa dizoloet Chrismenn ur rap orin. Gant penn kentañ e anv bihan hag e anv familh eo stummet an anv-arzour-mañ ivez.

→ Eus pelec'h e teu e zudi evit ar c'han hengounel ha sonerezh Breizh ?

Krismenn a zo bet ganet e bro ar sivi, e Plougastel-Daoulas, hag e dud-kozh a gomze brezhoneg. Seniñ a ra taboulin gant bagad Plougastel. Met e-pad ur fest-noz e oa bet ganet e c'hoant da vat, pa oa o selaou Louiz Ebrel hag ar vreudeur Kere. Desket en deus ar c'han-ha-diskan gant Erik Marchand. Krouiñ a ra ur stil sonerezh nevez, ur mesk etre rap ha sonerezh hengounel. Labourat a ra gant Alem, ur paotr a ra « beatboxing », un teknik evit ober luskoù nemet gant ar muzelloù, an teod, ar gouzoug hag an daouarn.

→ Evit deskiñ muioc'h diwar-benn Chrismenn ha selaou e sonerezh.

http://krismenn.com/krismenn/Solo_Krismenn.html

http://next.liberation.fr/musique/2014/04/16/krismenn-et-alem-breizh-beatbox_998876

Youna ha Mensye, 3de2

TRAOU LIPOUS

Ar c'houign amann



Kwiz

1. Ar c'houign amann a zo bet ijinet war-dro 1860 e :
 - a. Douarnenez.
 - b. Cancale.
 - c. Reading.
2. Ar c'houign amann 'n 'eus gounezet brud vat e Japan :
 - a. e 1952.

- b. e 1569.
- c. e 1990.

3. Ar c'houign amann 'n 'eus gounezet brud vat e Stadoù Unanet :

- a. e 2015.
- b. e 1952.
- c. e 2000.

4. Deiz ar c'houign amann a zo :

- a. d'an 12 a viz Mae.
- b. d'an 20 a viz Even.
- c. d'ar 15 a viz Du.

5. Mat eo ar c'houign amann ?

- a. Gwir.
- b. Gaou.

Respontoù : 1. a ; 2. c ; 3. c ; 4. b ; 5. a.

Rekipe kouign amann (8 den)

250 g bleud gwinizh
200 g amann gant holen
200g sukr poultr
10 g goell
2 piñsad holen
10 cl dour

E-barzh un tas, glebit ar goell gant 3 loaiad vras dour klouar.

E-barzh ur plad bras, meskit ar bleud hag an holen. Grit ur toull hag lakait ar goell ha 10 cl dour klouar e-kreiz.

Merit an toaz war an daol goloet gant bleud betek ma zeu da vezañ soupl. Loskit goiñ e-pad 3 eur war an daol.

Kemerit un tamm amann, amanennit ur moul rond.

Pa vo an toaz 3 gwech tevoc'h, pladit anezhañ war an daol en eur reiñ ur stumm karrez ur sentimetr uhelder dezhañ. Lakait amann warnañ ha poultrennit anezhañ gant sukr.

Plegit an toaz 3 gwech. Pladit anezhañ fin-tre. Pladit 3 gwech adarre. Pladit an toaz en ur reiñ ur stumm rond anezhañ.

Lakait anezhañ e-barzh ar moull ha loskit da ziazezañ e-pad 30 munutenn.

Lakait ar forn da dommañ da 210°C (thermostat 7).

Poazhit 35 munutenn. Goude 10 munutenn, glebit ar c'houign bep 5 munutenn gant an amann a deuzo e-pad ar pobadur.

Loskit diazezañ 15 munutenn a-raok divoulañ. Poultrennit gant 3 loaiad vras sukr. Debrit ar c'houign amann klouar.

Menam !

Enora, 6vet2

LOENED

Al loened fonnusañ war an douar

- 10 : ar c'hezeg a za da 70,76 km/h.
- 9 : ar c'hangouroued a za da 71 km/h.
- 8 : ar bleizi livet (likaoned) a za da 71 km/h.
- 7 : ar gedon a za da 72 km/h.
- 6 : al leoned a za da 80km/h.
- 5 : ar gnoued a za da 80,5 km/h.
- 4 : an antiloped Amerika a za da 88,5 km/h.
- 3 : ar gazeled a za da 100 km/h.
- 2 : an antiloped Indez a za betek 100 km/h e-pad pell ha betek 130 km/h e-pad ur predig.
- 1 : ar geparded a za da 115 km/h.



Bleuenn, 6vet2

Loened iskis

Ar pika d'Ili

Pika Ili eo ul loen deus familh an ochotonidaed. Ugentad sañtimetr eo. E Sina e vev, e lerc'hioù karregeg. E tregont vloazh n'oe ket bet gwelet nemet un ugentad gwech gant an dud. Kavet e oa bet e 1983.

Ar pika d'Ili war ar maen



Glaucus atlanticus pe aerouant glas

An aerouant glas a flot war an dour, e-barzh an dour yen pe tomm e vev.

An aerouant glas e-barzh an dour.



Ar sarpant mor pe regaleg

Ar sarpant dour a zo etre 4 ha 7 metr met a c'hell ober betek 11 metr. Ken hir eo ma o doa ijinet an dud e oa ur sarpant mor.



Ar sarpant mor o neuial e-kichen an aod.

Ar Pangolin

Ar Pangolin zo ur broner, merien a zebr. En Afrika hag en Azia e vev e lec'hioù-an Drovan.



Ur pangolin bihan war e vamm.

Bleuenn hag Enora, 6vet2

BROIOU HA POBLOU

Mumbaï



Mumbaï a zo ur c'hêr lec'hiet e kornôg Indez hag er c'hevandir Azia. Mumbaï en deus kalz a garterioù paour-razh evel ar c'harter Dharavi, ul lastez kêr gant 500 000 annezriad.

An dud ne vev ket mat e-barzh ar c'harterioù-mañ, peogwir an tud n'o deus ket dilhad prop na boutoù. Bez 'zo ur c'hwez fall, kalz a drouz ha saotradur, tomm eo an aer.

New-York



New-York 'zo lec'hiet e-kichen Washington e Stadoù-Unanet.

E New-York ez eus kalz a vatimantoù ha tourioù uhel. Bez ez eus karterioù paour evel ar «Queens» ha karterioù pinvidik evel «Manhatan». Pa vez gwelet New-York, e vez gwelet da gentañ eo ar c'hêr bras kenañ ha stank-tre. An dud a vev d'un doare tost heñvel eus hon doare, nemet ez eus kalz muioc'h a dud e New-York, kalz brasoc'h ha ledanoc'h eo ar c'hêr.

Lucie, Mélissa, Jeanne hag Enora, 6vet2

An Inuited

Doare da vevañ hengounel an Inuited

O chom e norzh an Amerika emañ an Inuited, a zo tro-dro 150 000 hiziv. Mont a reont war an erc'h war stlejelloù stlejet gant chas. Debrñ a reont kig kriz (kig reunig, kole-mor, balum...), setu perak e oant anvet « Eskimoed », da lavaret eo « debrerien kig kriz », gant o enebourien. Al loened chaseet ganto ne dalvont ket nemet evit o c'hig, met evit o c'hroc'hen ivez, sec'het evit ober dilhad, hag evit o eskern, implijet evit ober armoù. Ha pa'z eo gwall yen an amzer en o bro, e c'houzañv an Inuited an hin peogwir int boazet hag en em dommont en ur ober kalz c'hoariou evel ar meinigoù.

Ul lizherenn o deus an Inuited ivez :

△ i	▷ u	◁ a	
∧ pi	> pu	< pa	< p
∩ ti	⊃ tu	⊂ ta	⊂ t
ρ ki	δ ku	Ⓟ ka	Ⓟ k
ƒ gi	∫ gu	ℒ ga	ℒ g
Γ mi	∩ mu	ℒ ma	ℒ m
σ ni	Ⓟ nu	Ⓟ na	Ⓟ n
ʀ si	ʀ su	ʀ sa	ʀ s
⌒ li	⌒ lu	⌒ la	⌒ l
⌒ ji	⌒ ju	⌒ ja	⌒ j
△ vi	▷ vu	◁ va	◁ v
∩ ri	∩ ru	⊂ ra	⊂ r
Ⓟ qi	Ⓟ qu	Ⓟ qa	Ⓟ q
Ⓟ ƒ ngi	Ⓟ ∫ ngu	Ⓟ ℒ nga	Ⓟ ℒ ng
⌒ kli	⌒ klu	⌒ kla	⌒ kl

Setu bremañ ur c'hoari bihan evidout ! Ret eo dit skrivañ ar gerioù e brezhoneg e yezh an Inuited gant al lizherenneg a-us, da skouer :

Iglou	ILLU	
-------	------	--


Krogit bremañ !

Dilhadoù an Inuit		
Ar sae hengounel	AMAUTI	
An heuzoù	KAMIIK	
Ar manegoù	PUALUUK	
Ar boned	NASAAQ	
An anorak	ANURAAK	
Loened an norzh		
Arzh	NANUQ	
Karv-erc'h	TUKTU	
Reunig	NATSIQ	
Ki stejell	QIMMIIT	
Sevenadur an Inuit		
Kayak	QAJAQ	
Bark	UMIAQ	
Bag	UMIARJUAQ	
Stlejell	QAMUTIIK (qimmiit)	
Delwenn maen	INUKSUK	
Maskl	KIINANNGUAQ	
Sinema	TAQRALIJAARVIK	
Tud an norzh		
Inuit	INUK	
Plac'h	PANIK	
Paotr	IRNIK	
Iglou	ILLU	

En inuiteg e vez graet « un Inuit » « inuk », « daou Inuit » « iniit » ha « tri Inuit » « inuit ».


An Inuited o deus ivez c'hoarioù evel :

-an torr-penn :



- Danvez :
 -un tamm koad.
 -ur plat.
 -2 vouton.
 -ur fiseleenn.

-an treiñ-kenderc'hel :



- Danvez :
 -ur bouton.
 -ur fiseleenn.

- ar c'houlm : ret eo dit lakaat da vizied evel skilfoù.
- ar stlejell : ar fiseleenn o tremen dre pep biz. e ra an dorn all evit kemer ar fiseleenn o chom.
- an deltenn : kregiñ a ra evel ar stlejell ha ret eo tennañ an div neudenn e-kreiz war un dro.
- ar forc'h : kregiñ a ra evel ar stlejell ha ret eo tennañ war an neudenn o chom gant ar biz.



Jeanne, 6vet2

C'HOARZHIN

Istorioù farsus

Kaou en deus bet 20/20 ! Ar c'helener a c'houlenn gantañ :
« Lâr din ar wirionez, Kaou, ho mamm he deus sikouret arc'hanout ?
- Ket !! Ma mamm he deus graet an dever he unan ! »

Ar vestrez-skol : « Kaou, petra emañ oc'h ober ? Arabat c'hwitellañ en ur labourat !
- Piv 'n eus lâret deoc'h emañ o labourat ? »



« Kaou, paouez d'ober ardoù !
- Perak, Tadig ?
- A-hent-all 'vo da zremm divalav pa vi bras.
- Biskoazh kement-all ! Ur bern 'peus graet pa oas bugel, sur a-walc'h ! »

O c'hoari luj emañ Kaou hag e c'hoar vihan. Ar vamm a lâr d'ar paotr :
« Ret eo dit prestañ al luj d'az c'hoar !
- Evel just, Mammig ! Hi a bign ha me a ziskenn !!! »

Corentin, Axel, Goulven, 6vet2

BARZHONIEZH

Ar puñs

Merglet ar c'helorn houarn-pil

Ruz ar * chadenn
war an * traouilh
Man o * sevel
war ar * varlenn

Ha geot hir etre ar pavez.

Glas eo gant ar spoue

An nev-vaen he femp kogn.

An iliaev eleveziek a guzh

Mein dijuntr ar puñs

Ma neizh ennañ ur golvan...

Añjela Duval (barzhoneg treset diwar ur mennozh gant Enora)

Kabellig du

Ur wech eo oa ur bleiz bihan hag a oa o vevañ e-kichen ur c'hoad don gant e vamm. Jentil ha dous e oa. Un deiz e urzhias e vamm anezhañ: « Kas ur galetezenn hag un tamm amann d'az mamm-gozh, lapous. Met diwall da Gabellig du ! Kerzh war ar wenojenn ha na chom ket da stranañ ! »

Aon en doa ar bleiz bihan pa gemeras an hent : un euzhvil drouk e oa Kabellig du, a zebre ar bleizi bihan hervez. Mont a rae en ur grenañ pa glevas un drouz a-dreñv dezhañ. En em dreiñ a reas. Kabellig du a oa o parañ warnañ ! Gwisket e du e oa penna-da-benn, ruz e oa he daoulagad, dour a oa en he genoù. Seblantout a rae bezañ du gant an naon.

- Ro din da baner, eme an euzhvil gant ur vouezh raouiet.

- Ket, a respontas ar bleiz bihan, evit ma mamm-gozh eo !

- Ro din, 'ta !

O tostaat e oa Kabellig du, en ur astenn he daouarn.

- Ket !, A huchas ar bleiz bihan.



Neuze e tirollas Kabellig du da leñvañ.

- Met naon ' meus..., emezañ gant ur vouezh vihan-tout.

Brokus e oa ar bleiz bihan. « Deus 'ta da di ma mamm-gozh, emezañ, dispartiet e vo ar galetezenn hag an amann ganit. » Setu penaos e teuas ar bleiz bihan ha Kabellig du da vezañ mignoned vras.






AL LOENAKRONEJ



Charlotte
ECHU

AL LOENAKRONED




An Daou Sot

MIKEL



GWILHOU



ECHU
Goulven ha Corentin